



Ai'ta! Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Morlaix, le 14 février 2012

COMMUNIQUÉ

LANGUE BRETONNE À LA POSTE : UN MILITANT D'AI'TA CONVOQUÉ AU COMMISSARIAT !

Le collectif Ai'ta milite depuis 2007 pour que La Poste respecte la langue bretonne. Le 14 janvier dernier, une trentaine de militants avaient organisé un « sit-in » à la Poste de Morlaix, une semaine après sa réouverture, pour y dénoncer l'absence totale de notre langue dans la nouvelle signalétique. Face aux manifestants assis sur le sol, la direction de l'agence avait fait appel à la police et décidé de fermer la Poste. L'un des militants ayant pris part à cette action est convoqué mercredi 15 février, à 14h, au commissariat de Morlaix, 17 place de Gaulle, pour y être entendu dans le cadre de cette affaire. Ai'ta ! appelle à se rassembler dès 13h45 devant le commissariat afin de soutenir notre camarade et dénoncer l'attitude de blocage de La Poste, qui refuse systématiquement toute évolution sur ce dossier.

Cela fait plus de quatre ans qu'Ai'ta ! se bat pour que la langue bretonne puisse être vue, entendue et parlée dans les agences de La Poste en Bretagne. Pour nous, une langue que l'on ne peut utiliser dans la vie publique est une langue en grand danger d'extinction. Le breton est d'ailleurs classé par l'UNESCO parmi les langues les plus menacées. C'est pourquoi nous avons multiplié les actions de sensibilisation pour que les dirigeants politiques et ceux de La Poste se rendent compte de la situation et commencent à valoriser notre langue dans les différents services proposés aux usagers.

Les premières actions se voulaient avant tout ludiques et pédagogiques : festoù-deiz, faux guichets, votations citoyennes (comme à Morlaix, où 95% des usagers de La Poste ont voté en faveur du bilinguisme !)... en vain. Alors que La Poste procède actuellement à de nombreux travaux de modernisation de ses agences, nous avons décidé d'aller plus loin en lançant une campagne de manifestations dans chaque agence rénovée. Aussi avons-nous organisé un « sit-in » une semaine après la réouverture de l'agence de Morlaix : après avoir apposé des autocollants « E brezhoneg ! » sur la nouvelle signalétique, les militants d'Ai'ta se sont assis symboliquement sur le sol de la Poste pour protester contre le déclin de notre langue auquel La Poste contribue. A aucun moment nous n'avons empêché la Poste de fonctionner, ni même cherché à le faire : c'est la direction elle-même qui, refusant tout dialogue, a pris l'initiative de fermer l'établissement et appelé la police sur les lieux.

Tant que La Poste ne respectera pas notre langue, nos actions continueront et s'amplifieront. Porter plainte contre les militants d'Ai'ta ne servira à rien, car nous sommes prêts, s'il le faut, à aller devant un tribunal pour faire dénoncer le processus de disparition de la langue bretonne auquel La Poste contribue.

Contacts :

Tristan Nedeleg, *porte-parole du collectif Ai 'ta !*

Tél : 06 84 89 62 61

ai.ta.breizh@gmail.com

Dewi Siberil, *contact presse*

Tél : 06 31 18 17 71

ai.ta.treger@gmail.com



Ai'ta! Breizh

<http://ai.ta.free.fr>

Montroulez, d'ar 14 a viz C'Hwevrer 2012

KEMENNADENN

BREZHONEG ER POST : UR STOURMER EUS AI'TA GALVET EN TI-POLIS !

Stourm a ra Ait'a! abaoe 2007 evit ma doujfe Ar Post ouzh hor yezh e Breizh. D'ar 14 a viz Genver 2012 e oa aozet ur vanifestadeg difeuls e ti-post Montroulez, ur sizhunvezh goude ma oa digoret en-dro. Tregont stourmer bennak a oa en em gavet eno evit ur "sit-in" evit sevel hor mouezh a-enep ar fed ne oa bet roet tamm lec'h ebet d'hor yezh er banellerezh nevez. Dirak ar stourmerien azezet war al leur n'he doa ket kavet gwelloc'h d'ober ar renerezh evit gervel ar polis ha serriñ he stal. Unan deus ar stourmerien hag en doa kemeret perzh en oberenn-mañ a ranko mont da di-polis Montroulez (17 plasenn de Gaulle) d'ar merc'her 15 a viz C'Hwevrer, da 2 eur goude kreisteiz, evit bezañ klevet diwar-benn an afer-se. Gervel a ra Ai'ta ! an dud d'en em vodañ dirak an ti-polis adalek 14h45, evit skoazellañ hor c'hamarad ha diskuliañ emzalc'h Ar Post hag a nac'h ober an disterañ striv evit hor yezh.

Ouzhpenn pevar bloaz 'zo bremañ e stourm Ai'ta! evit ma vefe posubl gwelet, klevet hag implijout ar brezhoneg en tier-post e Breizh. Hervezomp, ur yezh ha n'eus ket tu d'ober ganti er vuhez foran a zo ur yezh en arvar da vervel. Renket eo ar brezhoneg gant an UNESCO e-touesk ar yezhoù en dañjer-bras zoken. Se 'zo kaoz 'meump aozet oberennoù a-vil vern evit desachañ evezh ar bolitikourien ha pennoù bras Ar Post war ar gudenn-mañ, evit ma vefe kroget da lakaat ar brezhoneg war-wel en holl servijoù kinniget d'ar pratikoù.

Da gentañ e oa oberennoù dudius ha pedagogel evit displegañ hon palioù ha klask eskemm gant renerezh Ar Post e Breizh. Mod-se 'meump graet oberennoù gichedoù faos en tier-post, festoù-deiz, votadegoù keodedel (95% deus pratikoù Post Montroulez o doa votet evit an divyezhegezh!)... en aner. Dre ma vez adkempennet un toullad tier-post er mareoù-mañ 'meump dibabet manifestiñ e-barzh kement ti-post kempennet a-nevez. Evel-se e oa bet graet e Montroulez e miz Genver tremenet, gant un "sit-in" ur sizhunvezh goude an digoradur. Goude bezañ lakaet pegsunioù "E brezhoneg !" ouzh ar pannelloù nevez e oa aet stourmerien Ai'ta en o c'hoazez war al leur evit diskouez eo kablus Ar Post ivez da ziskar ar brezhoneg. Morse 'meump miret ouzh ar Post da vont en-dro, na klasket hen ober zoken : renerezh ar Post, nac'het ganti komz ouzhimp, an hini he doa divizet serriñ he stal ha gervel ar boliserien da zont war al lec'h.

Derc'hel a rafomp gant hon oberennoù keit ma ne zoujo ket Ar Post ouzh hor yezh, ha kreñvoc'h-kreñvañ ez afomp ganti. Sevel klemm ouzh stourmerien Ai'ta! ne servijo da netra : prest omp da vont dirak ul lez-varn ma vez ezhomm evit diskuliañ diskar ar brezhoneg hag ar perzh he deus Ar Post ennañ.

Mont e darempred :

Tristan Nedeleg, *mouezh-aotreet Ai 'ta !*

Pgz : 06 84 89 62 61

ai.ta.breizh@gmail.com

Dewi Siberil, *darempred mediaoù*

Pgz : 06 31 18 17 71

ai.ta.treger@gmail.com